

12 lur

bremañ

EVEN 1986 N^o. 57

SALONS KENTAN AL LIVOURIEN PANELLOU-HENT



dija «échangeur» Dirinonn e miz Here... daou zevezh araok an digoradur ofisiel. Gwazh a-se evit meur a hent all e Bro Leon o deus resevat peb a gwiskad mat a goltar war o fanelloù.

UR VANIFESTADEG BREZHONEG YEZH OFISIEL

An dra-se ne oa ket tra-

walac'h da dud kalonek Stourm ar Brezhoneg : soñjet ez eus bet ganto livañ un nebeut panelloù war an deiz e Plougerne, kement ha diskouez splann o youl ha war-un-dro trubarderezh an Departamant. Graet ez eus bet d'ar 7 a viz Even eta ur vanifestadeg he deus bodet etre kant ha kant hanter-kant a dud, eus kostez bro Leon dreist-holl.

(heul pajenn 3)

Brav e oa an smzer, evit ur wech, an deiz-se e Bro Leon. Un devezh a zoare evit ober un tammig tro e Kêrbenn ar Vro Bagan, evit ar «premier salon des peintres de panneaux routiers» (sic Ouest-France 7 a viz Even 86)!

PROMESAOU TOULL

An dud a zo aet du-se o deus bet tro da welout pegen aes eo bremañ an hent da vont eus Brest da Blougerne, rak un hent nevez eo hennezh. Eeun ha kaer, gant roudoù saoz, ha bleuniou ha gwez ivez mar-plij. An departamant n'en deus ket miret e boan an douristed a vo kontant.

N'eus ket bet disoñjet panelloù - hentchañ giz nevez a-hed an hent-se, uhel-savet war o feuliou

aluminium. Unan bennak en doa lennet war ar c'hazetennou, e tro miz Du warlene, e vefe bet divyezhek ar panelloù-se. Paotrad ha merc'hed SAB Bro Leon, diwar glevout ar c'heloù burzhudus, o doa divizet prestah o gwisponoù hag o c'holtar d'o c'heneiled eus Kerne. An dra-se evit lezel e-pad ur prantad an ekipamant e peoc'h, evitañ da gempenn panelloù brezhonek brav, e-lec'h koll e nerzh hag e amzer o (klask) naetaat ar panelloù-hent livet gant ar sabidi.

Un huñvreadenn a-stroll eo bet, sur-awalc'h, ar c'heloù-se war ar c'hazetennou, rak m'hen asur deoc'h, n'eus ger brezhonek ebet war ar panelloù a oa war an hent nevez. Daoust d'e bromaesa, n'eo ket bet nec'het ar C'huzul

Jeneral o tigeriañ an hent ez-ofisiel, o pediñ kargidi ar c'hantou, ar rannvro, ar Stad, hag an... ekipamant.

BREZHONEG, YA 'VAT ! GALLEG : KOLTAR !

SAB ne oa ket pedet, anat deoc'h ! Prenet e voe neuze binvioù livañ nevez, eus ar c'hentañ troc'h, evit respont en un doare dereat da bilpousezhi kargidi departamant Penn-ar-Bed n'o deus ket dalc'het d'o fromesa. Ha dao d'ar panelloù-hent adarre ! Siwazh, paotred o zokou plat a evazhie mat war an hent-se rak ne felle ket dezho, moarvat, e vije bet louzat ar panelloù nevez-flamm a-raok an digoradur ofisiel. Skiant-prañet e oa hepken eus o ferzh, dre ma oa bet mastaret



luc'hedennoù Lena Louarn

HAG A NEVEZ ETRE DIWAN HAG AR STAD ?



Abaoc en emglev diwazhañ e miz genver, emser o c'hadal a teurevze Ministr an Daskadurazh reiñ urzh d'ar prefered anañ e Breizh da lakaat an traoù da vont war raok. Araok m'o dije an tiaz kâr da lavaret o soñj diwar benn digeriñ skolioù publik DIWAN en o c'hormun, a rankont anat eo, degemer ur gouleñ d'hen ober digant ar prefed.

«Gortoz pell, gortoz gwell...» a lavarer. Evit ar poent, ar gouarnamant nevez staliet e miz meurzh a zo goustad war roudoù an hini nevez aet kuit. Diwar glevet ar re a karg e Paris, emser o klask kempenn a-nevez an emglev, hag e saurt ma c'halle bezañ sinet ivez gant SEASKA.

Daoust d'an Euskariz bezañ bet sinet un emglev e miz Du 85 pa vado DIWAN o nac'h sinañ, n'int ket bet evit dagarned ar c'hinnigoù nevez, graet e miz genver goude taol gwidreus ar c'huzul-stad da galaganañ, tra ma zegemara DIWAN anezho, aet skuzh da c'hortoz gwelloc'h.

Diwar glevet atav, e kendañc'he maestra ar ministr nevez da heuliañ an hent bet bouc'hat gant CHEVENEMENT da lavared eo digeriñ dor ar servij publik d'hor skolioù ha d'hor mistriskol. (e pe doara nevez ne ouzer ket avat...)

Evit DIWAN, kement-se a chom an hent nemetañ ar c'houlz-mañ, evit ledañ ar strizh e chomfe e blas e mod all etre ar skolioù publik diouzh un tu hag ar skolioù prevez en un tu all.

Ar brezel publik prevez a zo e Breizh, muioc'h evit e lec'h all marteze, un dra ne c'haller ket chom hep darc'heil kont anezhañ ken ez eo alies un dibab ideologel pe ekonomikel (moit a ra

alies asamblez) a ra ar familioù p'emaint e sail skoliatañ o vugale : un dibab e lec'h ma n'en deus ket ar brezhoneg kalz e bouez evit ar poent, ken bevez eo c'hoazh e spered an dud al labour didalvoudekast kaset a-benn a-enap dezhañ.

E sa e c'haller bezañ kasi sur ne tiwano skolioù prevez mod DIWAN namet goude ma vo bet staliet da vat skolioù publik DIWAN. Hag ar c'hontrol ma chom DIWAN ar maez ar servij publik, ar skolioù prevez ne gavint ket anañ o-feraz ha ne vijent ket neuze avansatoc'h.

Darc'heil kont a ranker ivez eus stad an niver e c'hannedigazhioù o vont war vianhaat e familioù Breizh bemedz koulz hag e familioù Europa dia vras. Ur bugel hviz, ha war ar maez dreist-holl a c'hall talvezout ur peat ouzhpenn pe ur post nebautoc'h evit ur skol. Ouzhpenn kudennoù ideologel ez eo eta kudennoù boutik a sav etre ar skolioù ha da zivall 'zo e savo muioc'h c'hoazh an amzar da zont.

Chom war un hent etre ste skolioù stad diouzh un tu, skolioù kristen diouzh un tu all, skolioù Diwan e kreiz, e vije ouzh DIWAN da greskiñ kement ha ma 'z eo ret e rate evit respont da ezhommoù pobl Vreizh e bloavezh 2000.

Sad aze perak e rankamp dont a-benn da zigeriñ dorioù ar servij publik da sistem pedagogel DIWAN evit ma c'halle kement bugel e Breizh tennañ a vad diouañ.

N'eo ket radoterezh adskrivañ kement-mañ pe lenner pe c'hoazh pa glevet e pelec'h emañ sachet ar preder war an dachenn-mañ e speredoù 'zo.

IKiliavere

KELEIER

FABIUS ER MAEZ

Kevit hon eus a Laurent Fabius, bet ministr-kenañ ar Republik Gall, da zont da Wervignon, pelec'h ma 'z eo gant Maurice BRIAND, bet kannd, maez c'hoazh e Gwengamp.

Ar Fabius, end-yeun en doa nac'h lakaat an darn-veur-kontañt ar yezhoù gwaeket gant ar Stad war roll breudour ar Gwengamp. Un embod d'ar brezhoneg eta eo an Autrouz d'ar degenn Yann Leskidi.



STOURM AR BREZHONEG

D'ar 14vet, Benerzh an Dezaouerezh (14vet), ennavadur an I-SAB livet ha diskart kantadeg a barellioù-hent e Breizh ar pep departamant. Dizezet en deus SAB astenn e oberzhed war Breiz. Livet er eus bet an noz-se liguget war-megourz Ministrerezh an Dezaouerezh (14vet), Skol Uhel an Dezaouerezh (14vet), Servijioù Statistikoù Ministrerezh an Dezaouerezh (13vet), Servijioù an Dezaouerezh dre an Hentou.

TOULLBAC'H EVIT DISENTREZ An Lezenn-Engval Roazhon, brudet evit bezhañ kalc'het-mout, ez eus bet kondonet tri objektour noaset, unan anezhañ da 10 miz toulbacz, an diou all da 8 miz, dre ma 'felle dezhañ distruet kevredaden an holl gendeizourien diok al lezenn, ar-ra-dennno diaktret enni, an diok kevredadennoù yezhañ hag ar vobezh-geozed, eme ar varnerien.

KENSTRIVADEG Kentrivadeg evit bezhañ deus an Akademienn Roazhon, eo lakaat an anv brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

Ar vor war yez ar stourmer Kristian ar Bihan marvet war-lerc'h e Gwengamp.

CHEKENNOU ADARRE


Gant lez-tenn-harn Pariz eo bet torret barnaden lez-angval Roazhon a rose ar gair da JILL BENHARD a-semp an S.N.C.F. er aler ar chekennoù-brezhonek. E Csan a vo adrevent an aler. Da c'hortoz a cheñfer ha out son e vo nac'h adarre ar chekennoù gant an S.N.C.F. Chafs a vo ma ne ra ket kemend-all EDF an talloù, hag all.

PROSEZ AN ELSASEG

D'ar 12 a viz Meurzh 1986 eo barnet Robert JOACHIM gant Lezenn Strasburg. D'ar 18 a viz Kerzu warlenn a oa bet an adrevent, met ampellet a oa bet ar prozez da c'hortoz a heul an testoù an ardennoù ha daou genod adrevent a Vro-Flandrez Kuglers ha Vandemulderbuc.

Kalc' tud a oa deuet d'ar c'hazetenn, hag ar skinner-arnere, ma Pariz, Bada-Wurtemberg ha kazetennerezh e Breizhoù Europa, ha kalc' stourmerien yezhañ ha mignoned, dioudeus ma keredigezhour evit Gwengamp. Kennet a oa bet ar Prokurour Kev. An doas lavaret 'n'o doa ket an ardennoù da gomz ur yezh all eget ar galleg.


AR FEDOU En Hagenau eo da bet goulet e baperioù digant Robert JOACHIM pa oa o viliant ar Gern-Hennah en doa nac'h o veñ dre ma ne vize ket goulet digant an Elzaseg. Tamallet a oa bet dezhañ nac'h diskouez e baperioù, da lez ar noz eo bet torret meliad Lezenn Roazhon an Hent.



NOBIFVAC AUJESZKY

Kevit hon eus a Nobifvac Aujeszký, un den brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

TCHERNOBYL, N'EO KET ECHU !



Tost bemdez e vez kaozeet eus gwallzarvoudoù e kreizenn nukleer e Tchernobyl. En URSS eo war-hed 150 kilometr eus Tchernobyl e vije komzet ar vro 80 000 haer a zo bet pellet-hag ar laboed gant o mammoù.

N'eo ket gant se e vo c'hoat pennoù bras ar gwanterezh, 85 % eo tredan Franca a zo eus ar c'hazetenn nukleer (37 % e bro-rouz) ar C'hembraec'h, ha krestañ a ray c'hoazh an dizezet.

PAOUZ GANT AR C'HREZENN NUKLEEL En gwanterezh ar re c'hias a kas ar stourmer war-lerc'h, ar re c'hias a kas ar stourmer war-lerc'h, ar re c'hias a kas ar stourmer war-lerc'h.

NANN D'AN DISTRU NUKLEEL

Kevit hon eus a Nann d'An Distru Nukleel, un den brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

HANV OKSITANIA stajou yezh, kultur, dans

Kevit hon eus a Hanv Oksitania, un den brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

SOKIAL

EMGLEV BRO AN ORIENT

'EMGLEV BRO AN ORIENT' emglev lezennadur enni dek kevredigezh lezennadur. Evit seer pe e vije gant an abourer, ar melistraderezh, ar melistraderezh, ar melistraderezh.

KANT BRO, KANT GIZ KANT TEOD, KANT BLAZ

Tost lipous eo ar Suised, ha sport a vije gant an abourer, ar melistraderezh, ar melistraderezh, ar melistraderezh.

NANN D'AN DISTRU NUKLEEL

Kevit hon eus a Nann d'An Distru Nukleel, un den brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

HANV OKSITANIA stajou yezh, kultur, dans

Kevit hon eus a Hanv Oksitania, un den brezhonek a vije Gouere 86. An ardennoù a vo war-dia an 11 vev Gwengamp (10 anv) dennoù yezhañ, diok a vo izod. Hec eo d'ar dud kevot un DEBETS, DUT pe d'ar holl.

BREMAN NIVERENN 57
MIZ MEZHEVEN 1986

TAOLENN

Livourien panelloù	1
DIWAN HAG AR STAD	1
LIZHURI AL LENNERIEN	2
LIVOURIEN PANNELLOU	3
Keleier	
FABRUS ER MAEZ	4
CHEKENNOU ADARRE	4
PROGEZ AN ELZASEG	4
BRUDEREZH BREZHONEK	4
Sokial	
TCHERNOBYL	5
KANT BRO KANT GIZ	5
NANN D'AN NUKLEEL	5
OKSITANIA	5
Deskadurezh	
KELENN AR BREZHONEG	6
Radio	
RADIO KREIZ BREIZH	7
ALLO ALLO	7
RADIO TREGER	7
Deskiñ	
LEVRIOU BREMAN	8
STAJOU	8
SPORT	8
Dudi	
SEKREDOU CHANIG	9
FICHENNAOUEG	9
X2000	9
DIWAN	9
Kemennadennoù	
MESK-DIVESK	10
GOUELIOU	10

AR VAKETENN GANT Lena Louarn, Jil Killevere ha Nolwenn Louarn.

AR PENNADOU GANT Argad, Jil Killevere, Mark Kerrain, Yann Leskildri, SAB, Malo Bouessel, Joel Donnart, Pol Lonkek, M.Madeg ha Y.Olier, Herve ar Beg, Lukian Kergoal, Solenn Piriou, J.D.Robin, Bruno Per, Chanig, ha Garan ar Meur.

Skozell gant Noëlla Olier.

Euc'hskeudenoù gant Lena Louarn.

Tresadennoù gant Deonart ha Malo Louarn.

RENER AR GAZETENN Mikael Boudo.

Moulet e "TI MOULEREZH AL LISOU" kae sant Kast 35000 ROAZON-99.30.38.30.

KOUMANANT BLOAZ 120 lur. Skozell adalek 200 Evit 6 Miz : 70 Lur (6 niverenn), da gas da v-BREMAN 8 ru Hoche 35000 ROAZON -pg. 99.38.75.83.

KOUMANANT BLOAZ
120 lur

Three Miles Island a zo deuet da vezañ ul lec'h touristelezh ; Tchernobyl a vo ivez ur wech bennak, emezan ar miz diwezhañ. Met n'emañ ket EDF war-lerc'h war ar poent-se kennebeut : 400 000 den a zo bet gweladennet kreizennoù nukleel ganto e 1984 ; ha war an ton bras peurvuiañ : merc'hed koant o tigemer ac'hanoc'h, filmoù, sal ar mekanikoù diskouezet.



Pal an douristelezh ijinerezhel-se : Lakaat Hiroshima da vezañ disoñjet gant an dud, lakaat da greidiñ eo sur ar c'hreizennoù nukleel... Disoñjet e oa bet Three Miles Island betek Tchernobyl, hag e vo disoñjet Tchernobyl betek ar gwallzarvoud a zeu.

Laeroni, vandalezh, argadoù ! N'eo ket PASQUA hepken a denn gounid anezho evit kreskiñ niver ar boliserien. Arc'hant a zo da c'hounit ivez, ha sistemoù nevez a vez ijinet :

lakaat amañ tamm paper didroc'het

Gant ar F.T. où ijinet gant DEFI e vo bouzet o tiskouarn a-zalek ma vo unan bennak o tostaat ouzh o ti. Hag ouzhpenn e vo galvet peder niverenn pellgomz a-zalek ma vo an argaderien en ti...



Ur wech bennak e vo gwelet tud o pourmen er straedoù pe er parkeier gant mekanikoù a-seurt-se.

DA WERZHAN

TI KOZH da werzhañ, 1 eur hent eus Roazhon, koadeg Pem-pont. 80 000 lur, armezien brezhonegerien. Titouroù : 99 - 07.85.03.

UR C'HARR FORD SIERRA break 1984, priz argus : da varc'hata. Pellgomz : 98 - 04.15.17.

KREIZENN AR VREZHONEGERIEN E BREST

Beaj da Enez EUSA d'an 22 a viz Mezheven. Pred miziek ar greizenn a vo d'ar 26 a viz Mezheven, ha d'ar 14 a viz Gouere (!), ez oc'h pedet d'ur Mechoul. Enskrivadurioù : 21 straed Inkermann - 29200 Brest (pellgomz 98-44.05.38 pe 98-47.45.80.)


MESK- DIVESK



Breizh a zo ar vro nemeti ha n'eo ket bet tremenet koumoulenn skinoberiant. Tchernobyl en oabl. Ouzhpenn-se n'eo ket savet kreizenn nukleel ebet enni.

Ur bruderezh dispar a vefe

da sevel gant Bridel, Even, Gourveneg hag all... **spreñt laezh, amann, gruyer Breizh. Prenit kaol-fleur ha legumaj Breizh, prenit marc'hadourezhioù labour-douar Breizh, ar vro nemeti a zo digreizenn nukleel ! Arsa, dav dezhi Made in Breizh !**



Emiz C'hwevrer eo bet distrujet ur savadur H.L.M. e La Courneuve (Seine St Denis) : 370 rannidi a oa ennañ, 16 astaj ; 185 Ma hed, 10 000 tonenn a bouez. Evit lakaat anezhañ da darzhañ eo bet implijet 600 kg dinamit ingalet e 2800 toull !

Ma fell dezho distrujañ

an holl euzhadenoù a zo bet savet er ZUP-où abaoe ugent bloavazh, n'eo ket labour a vanko.

Ha peogwir eo chalet ME-HAIGNERIE gant priz ar rannidiez H.L.M., n'eo ket met lezel ar familhoù er savadurioù araok an tarzhadennoù. Kudenn ebet ken gant ar re baour...

Kemennoù a vez lennet ken alies bepred eo kinnigou-labour an arme ; n'eo ket pell em eus gwelet e oa klask war tud yaouank barreg war ar rusianeg. ... Evit ar re a fell dezho chom dilabour en ur vezañ paet gwelloc'h eget gant an ASSÉDIC.

E Gwened, ez eus bet pemp soudard eus ar 3de RIMA o tiskouez o nerzh, o youl hag o deskadurezh, en ur wallañ ur plac'h en Aire d'an 19 a viz Mae. Ha merzet o peus pegen alies e vez soudarded e darvoudoù a-seurt-se ?

E Pariz e vez lennet embannoù a-seurt-se er c'hazetennoù : « Kinnig a ran 20 000 lur d'an hini a gavo din ur rannidi da feurmiñ... » Implijet e vez an doare dre amañ ivez evit klask un tamm labour pegañ amañ an tamm bihan paper

■ Chômeur DONNE 3 000 F à qui ma trouve une place de chauffeur 19 t. ou 38 t., exp. en 19 t. j'ai 31 ans. Ecrire au journal n° 649023 M.

A-benn un nebeut bloavézhoù e c'hoarvezo ar pezh a zo boutin e broioù ar sav-heol (Korea) : Kinnig labourat evit netra e-pad daou vloavazh gant ar spi e teurvez gant ar renerien reiñ deoc'h un tamm gopr da c'houde.

Ne vez ket gwelet seurt kemennoù evit mont da veleg en Iliz Kristen avat ; ar c'hontrol kentoc'h. N'eo ket e vez an Iliz gant se ha d'an ugent a viz Ebrel e oa bet aozet «delz ar c'hali-vidigezh» er Bed ; e Mur e oa prezezennoù war an afer...

Met pep pemzektez ez eme d'an ANPE da glask fred, hag en em c'houlenn a ran perak ne vez kinnig-labour ebet gant an embregerezh-se. (notann da rener BREMAN ur bajenn a-bezh eo ret mirout en niverenn a zeu evit ar respontoù).

Epenn kentañ miz Mae eo bet dalc'het devezhoù-studi gant ar Front National e Rochefort-en-Terre (56). Prezezennoù a zo bet displeget diwar-benn ar skol, ar rannvro, an tiegezh, an arme...

Ger ebet diwar an estranjourien pe ken nebeut. Ha diouzh ar Sadorn e oa bodet an holl en-dro d'ur mechoul ! Piv a laro eo gouennelour ar Front National pa vez dibret pradoù an Arabed gant e izili ?

Garan ar Meur

SONADEG

Gant GWERZ ha TI-JAZ e ker ar Roc'h-Derrien (Bro Dre-ger) d'ar Sadorn 19 a viz Gouere, aozet gant "Ti-Villaj" adalek 9 eur noz !

SANT MALO

Gouelioù ar "Clos-Poulet" e sant Malo d'an 18.19.20 a viz Gouere. Folk, sonerezh, kan, koroll, dibunadeg, laz-seniñ, nozvezh laouen ha da glozañ eveljust FEST NOZ BRAS.

KERNE

Gouelioù Meur Kerne eus an 21 d'ar 27 a viz Gouere. Anavezet mat eo ar gouelioù-mañ gant an holl. Da c'hout zout hiroc'h, da gaout ur stand pe ul lec'h evit ho ke-

vredigezh pellgomz d'an niv 98-55/53/53 pe 98-90/09/33.

ROCK

Kenskrivadeg Etrevroadel Sonerezh ROCK, er "Petit Château", e Konk-Kerne, d'an 28 ha 29 a viz Mezheven. 20 bagad sonerezh Rock o kemer perzh en ur c'henstrivadeg. Prizioù a vo : kentañ priz tregont mil lur, eil : pemzek mil lur, trede : pemp mil lur. Ouzhpenn-se e vo roet ur priz a zek mil lur, e anv "priz ar minorelezhioù" evit ar strolladoù a gano e yezh o bro : brezhoneg, kembraeg, korsikeg, okitaneg, gouezeleg, berbereg, yezhoù afrika hag all...

Savet eo bet ar c'henstrivadeg-mañ gant KREIZENN SKOAZELL DIWAN KONK-KERNE.

GOULENNIT MA VO LAKAET HO CHOMLEC'H

E BREZHONEG GANT HO PANK HO TAILLANTER, EDF, CFRT, CPAM, CCP, HAG ALL.

(Tud zo deuet a-benn gant ar CMB, CFRT, EDF). Ha kasit keloù dimp, ma rit berzh pe nann.

Ma n'eo ket brezhoneg e skol ho pugale GOULENNIT dre lizher ebeted digant an Enseller Akademie ha kasit keloù dimp